

(300, suite)

Glac'har euz Ene fidel,  
Var Malheuriou Franç.

Var ton Canaouez Pot an Aweant.

Roit d'am docoulagad, va Doue,  
Diou ruzellân a gaelou,  
Ma illin gouela nos ha de  
Ar malheuriou deus va bro. } Bis.

Eur galon a c'hlac'har mantriet  
En em soulaj o vouela;  
Deus va foan n'oullân gen remed  
Qeit a ma vin er bed -ma. } Bis.

(301)

Ne voa Rouantelez er bed  
Caeroc'h evit Franç quechal;  
Setu en pare distrujet  
Gant eur vandennat tud fall. } Bis.

O hano zo Protestantet,  
Adversourien da Zoue,  
O deus eur bobl mad egaret  
Dre o maximou neve. } Bis.

Ar rema biscoas n'eus soufret  
Nag X'riz na Rouane;  
N'anoveont gen Mestr er bed  
Nemet an Egalite. } Bis.

Egalite ha Liberte,  
Setu eno o Mestron;  
Setu eno o rouane,  
Ha memeus o idolou. } Bis.

(302)

Deus maximou gen dangerus

230

E teu peb seurt maleuriou ;  
 N'en deus na reglamant nag urz } Bis.  
 Lec'h ma ve an oll mestrou .

Me ya da goumanç dre 'r sourcen  
 E deus grêt malheur hor bro :  
 Heullit ac'hanon pen-da-ben,  
 Ha dalc'hit mat d'am c'homz . } Bis.

Louis - C'houerze, en e amzer,  
 Dre valeur a g'emeraz  
 Eur Protestant, hanvet Necker, } Bis.  
 Erit govern en e blaç .

Hini demeus ar Rouane  
 N'o devoa biscoas finjiet  
 Gemer tud eus eur fe neve } Bis.  
 Da regli o c'habinet .

Rag laqat gant Catoliget  
 Protestantet er c'hargo,  
 A zo eur voyen assuret } Bis.  
 Da ober maleur eur vro .

(303)

Necker a vag en e galon  
 Torfejou deus ar goassa ;  
 D'an Tron ha d'ar Relijion } Bis.  
 E ro an attaq genta .

P'en deus dispozet peb tra tout  
 C'hoezet hon oll maleuris,  
 En eus prest gemeret e rout } Bis.  
 Hag en em dennet d'e vro .

Brema elles, monst' infernal !  
 Livra da galon d'ar joa,  
 Pa c'heus alimet an tan goal } Bis.  
 En eur vro eus ar gaera .

Ar Vinistret eus da verjanç  
 Teus griennet en hon toues,

(304)

Haq a ra soufr bennde da Franç,  
A beb seurt fallagries. } Bis.

Chasseet eo ar velezen,  
Ha ranverset an Hiz;  
Ar Roue zo couezet e ben  
Var ar chafaud e Paris. } Bis.

Pez ar Rouanez prest goude  
A zo coueet c'hoas d'an douar,  
Haq ar memes de e coueet  
Pen Elizabeth, e c'hoar. } Bis.

Louis-Seitec, haq en bug'el,  
Dalc'het ive er prison,  
O deus laqet c'hoas da vervel,  
Dre an nevez eus ar prison. } Bis.

(305)

Deus d'en em goach, eol benig'et,  
O velet eur sort crimou,  
Ne ellont bea commetet  
Nemet gant drouc - sperejou. } Bis.

Deus e vadou, deus e vadou  
N'en deus den sur en hon toues:  
Laza ra an eil egile  
Hoas evit al louenet gouez. } Bis.

Setu aze ar fouez neve  
Eus doctrin heritaget;  
Setu deus an Egalite  
Aze an enrustet. } Bis.

Me grën va c'halon o velet  
Donder ho couli brema;  
Mes petra a dal clasq remet  
Pa ve ar gangren enna? } Bis.

(306)

M'om bijemp bet Doue caret  
Demeus a greis hor c'halon,  
N'en dije qet or c'hastiet  
Dre qelies a feçon. } Bis.

232

Dibot an hini zo en Franz,  
 N'en deus da reprochi deün  
 Eun dra benac e goustianz  
 Var ar maleurieu bremän. } Bis.

En toues genties a valeur  
 Hon eus tennet varnomp oll,  
 Ho Relijion, va Zalver,  
 Zo ét demp, siouas, da goll. } Bis.

Birvigen n'en em efaço  
 Ar c'holl-ze deus va speret;  
 Ar c'holl demeus an eneoü  
 A zo eur c'holl diremet. } Bis.

N'eus na poaz nag afliction  
 N'om bijemp atijiduret c'hoas,  
 Ma vije ar Relijion  
 Chomet ganemp en he flaç. } Bis. (307)

Ranna a rango va c'halon,  
 Ma na deut, ò va Doue!  
 Da laçat ho Relijion  
 Da fleurista a neve. } Bis.

Rac penos beva divorc'het,  
 Privet demeus ho c'raçou,  
 Hag eb esperanz d'o quelet  
 Na d'o meuli en ênvou? } Bis.

O Relijion adorabl,  
 Fontet gant goad va Zalver;  
 Merq precius hag admirabl,  
 Eus eur garante dener! } Bis.

N'o quellomp qet eta bigen?  
 Adieu a leret d'hoü bro;  
 Quitat a rit ar Françisiem,  
 Indign eus ho faveurieu. } Bis. (308)

Adieu eta, Templou santel,

Adieu, hon quir ministret;  
Ret eo bremañ eta merwel  
Heñ bea sacramantet! } Bis.

Corf precius eus ~~ha~~ Zalver,  
Goad sac'r scuillet var ar groas,  
N'a gefomp mui var an Oter  
O c'houlèn evidomp graç! } Bis.

Na glevimp genebeut bigen  
Ar c'hlezer eus hon g'ervel  
Da vont da glêvet an oferm  
Nag an ofiçou santel? } Bis.

(309)

Adieu eta fong - badiant,  
Adieu, Cöversionou;  
Drejac'h e voamp, en un instant,  
Goelc'het eus hor pec'hejou. } Bis.

Demeus clevejou hon ene  
N'or bo qen eta remet?  
Petra rafomp - ni, va Doue,  
Mae na deut c'hoas d'or c'haret? } Bis.

Adieu, cador ar virione,  
En pelêc'h emeus clêvet  
Traou profitabl bras d'am ene,  
A rê brezel d'ar pec'het. } Bis.

Tud fidel, fontet en daerou,  
En ho coll sonjit erfat;  
Deut da vouela ho pec'hejou,  
Mesqit daerou drus ha goad. } Bis.

(310)

Pedit erit ar bec'herien,  
Ma plijo gant hon Doue  
O tãprosi d'ar binijen  
Gent laqat fin d'o bue. } Bis.

C'houi ive, toudou ha mamou,  
N'oufac'h bigen gouela re

234

O velot ho fugalingou  
En hent da goll o ene. } Bis.

Mar de anfin erru in amzer  
Ma chomfomp bars er stad-ma,  
Va Doue, m'o ped d'om g'emer,  
N'oullomp gen chom er bed-ma. } Bis.

Aus va moez ma ne selaouet,  
Me gris var boez va fen,  
Ha marteze em recefet  
Evel ar Gananeen. } Bis.

(311).

Pell dious joayou fos ar vro-ma,  
Demp da dremen hor bue,  
Ma ne aller caret ama  
Na religion na fe. } Bis.

(Vol. II, p. 300-311.)  
43 str. numérotées.